

SONIG AR IAR.

War eunn ton anaveet.

Me gano d'ac'h mar chelaouet
Eur zonig a zo bet savet
Diwar-benn meuntrez ar ier ;
Tolet ple na pe zort micher !
Dismegansusan hini, vad !
Ha lousan vîd eur plac'h a stad.

Eur iarik neve deut er bed
A gare stard hep mar-cbed
Klevet ar c'higi hag ar ier
O kanan tro-war-dro d'he c'her,
Ken a c'hoantaaz eur beure
Monet da welet aneze.

Ann daouzeged a viz genver
E iez hon iarig euz ar ger,
Mont a rez kuit diwar ar c'hlad
Hep ma reaz nimeur a vrud,
Ti eunn amezek da vale,
Ann tol kentan euz he bue.

Dal ma lekaz he fenn enn ti
Laraz Fransez an Vari
C'han-ta Mari, me Fransez an,
Mar g-hellomp krige er iar-man
Pa dei tudigo da vale
A vo mad d'ober souben d'he.

Ar iarik baour, dal ma glevaz,
Monet prim er mez a glaskaz ;
Klask tec'hel kuit war vek botez ;

Mez siouaz paket ar iar gez :
E kraou ar zaout e oe taget ;
Ha raktal enon dibluet.

Ann amezien gant glac'har
Gleve kriadenno ar iar :
Krial a re a-boez he fenn
He bue war ziou gailloustren :
Rait d'in eur pennadig amzer
Da ober kimiad d'am zud ker.

Kimiad a rann a galon vad
D'am diou vestrez ha d'am mestr mad,
Koulz d'ar c'higi all euz ar vro
Ha d'ar polezi tro-a-dro ;
Me a het d'ann oll blavez mad
Med d'ann hini a skuil ma goad.

Potred iaouank, o pidi rann,
Pa vo deut ar pardonio han
Mar gwelet meuntrez ar ier
Diwallet mont d'he c'has d'ar ger ;
Tolet evez ann neb he c'har,
Pe en defo soubenig iar.

Ha c'houi, klevet, amezien :
Mar g-a ho ier d'ober souben
E tevio kernez war ar ier
Hag ann uo da vean ker ;
C'hoaz e vo groet malarge fall
Ma ne ve kat eunn tamm kik sall.